

### **Konje roët**

Na duit ket d'am goëlet na dre va jardrinou  
Terri va c'holl a bressa va louzou.

Na deuit ket d'am goëlet na gant o tokik plous  
Biken pot e tokik plous na vez va amourous

Na deuit ket d'am goëlet na gant ho c'habid ven  
Biken pot he c'habid ven na kousk em c'hichen

Pot e voned Sigovi e vezo va hini.

Moris Follezour, 18 mars 1851.

### **Chaden an amitie**

me a zo bed pel amzer ne allen ket credi  
e vije an amitie kapab dam arreti

mez e kreiz va foaniou me a choarze neuze  
Doc'h kement hini a zouge chaden ar amitie

Pa voan o studia me moa bed eur gentel  
Digant eur mignon din hag am c'harie fidel

Da zivoël va c'halon oc'h an amouroustet  
Birviken plijadur nam bije var ar bed.

Moris Follezour, 18 mars 1851.